

SILVESTRIK

Eur zôn goz, var eun ton truezus ha kaer meurbed,
bet savet divarben eur zoudard yaouank en amzer
ma pade pell-braz ar gonje-zoudard.


Andantino



E - tre cha-pel sant Ef-flam ha to-sen Me-ne Bre, zo



eur c'ha-bi-ten yaou-ank o se-vel eun ar-me: Zo



eur c'ha-bi-ten yaou-ank o se-vel eun ar-me: Me



meuz eur mab, Sil - ves - trik, a la - var mont i - ve.

- 2 « Siouaz, aotrou Kabiten, 'meuz ken mab nemetan
Ganen c'houi 'po 'r vadelez da lezel anezan. »
— Allaz ! tad koz maleuruz, ar marc'had 'zo sinet ;
Touchet en deuz an arc'hant, d'an arme 'rank kerzet.
- 3 A berz an tad glac'haret, var dachen ar brezel
Eun dervez eul labousik a nij a denn-askel :
— « Deiz mad deoc'h c'houi, Silvestrik, deiz mad ha levenez,
Penaos ema ho yec'hed, ho nerz hag o puez ?
- 4 — Disken 'ta, labous bihan, disken var da zaou droad
Ma skrivin d'id eul lizer da gas d'ar gêr d'am zad :
« Yac'h eo ho mab Silvestrik, yac'h ha laouen bepred ;
» Dizale e tistroio var-zu e vro garet. »
- 5 An tad bemnoz ha bemdez ne baouez da zonzal
En e grouadur yaouank en arme e Bro-C'hall.
E kreiz an noz, ec'h hunvre hag e stag da ouela :
« Aotrou Doue, Silvestrik petra deu da veza ! »
- 6 P'edo kousket an tad koz 'n e wele kousket mad
Ar merc'hed a oue klevet o kana son e vab
Silvestrik zo d'ar mare demdostik d'an treujo
: « Na ouelit ket va zad kêz ho mab a zo distro ! »

Destumet gant P. TR.